



# BLEUN-BRUG

Niv. 109 (Mizieg-Mensuel)  
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

EBREL 1958

## TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur kourm. a enor — 1.000 lur kourm. madoberour) da :

**Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.  
C. C. P. 1541.90 Nantes.**

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**

Mar fell deoh beza ezel euz ar Bleun-Brug pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

**V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist  
C. C. P. 544.22 Nantes**

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

## TAOLENN

|                                                            |    |
|------------------------------------------------------------|----|
| <b>Euz Lizer a Bastor Aotrou 'n Eskob Kemper</b> .....     | 1  |
| <b>Devez kaer Sakridigez on Aotrou 'n Eskob Favé</b> ..... | 2  |
| <b>D'an Aotrou 'n Eskob Favé, gand Mab an Dig</b> .....    | 3  |
| <b>Lokrist an Izelled, gand Yeun ar Gow</b> .....          | 5  |
| <b>Deskom brezoneg</b> .....                               | 12 |
| <b>Teñzor ar brezoneg beo, gand V. F.</b> .....            | 14 |
| <b>Kan al Laboused, gand L. Lok</b> .....                  | 15 |
| <b>Keleier</b> .....                                       | 16 |

Deut eo er-mêz niverenn 5 « Les Cahiers du Bleun-Brug ». Ar houmanant da « Bleun-Brug » ne dalv ket evid reseo « Les Cahiers du Bleun-Brug ». Evid o haoud, skriva da : Jean Cormerais, Professeur au Lycée de Garçons, Rennes. C.C.P. 77.60 Rennes.

Koumanant-bloaz : 200 lur.

## Euz Lizer a Bastor Aotrou 'n Eskob Kemper



### Diwar-benn an doareoù nevez da embann ar menozioù

...Arabad soñjal he-defe aon an Iliz ouz an traou nevez a hellfe spered an den ijina ; ne reont nemed « diskouez splannoh brazter ha galloud Doue » an doareoù embannerez ive a hell sikour « rei d'an den eur vuhez kaeroh, dizammoh hag eurusoh », en eur zigeri ar sperejou hag ar halonou, en eur lakaad ahanom da zoñjal en Iliz a-bez astennet dre ar bed, en eur rei d'an Iliz benviou nevez a abostolerez.

Sikouret o-deus ahanom dija da greski on deskadurez. Sonjit 'ta penaoz e oa kont daou ugent vloaz 'zo ; eet er mêz euz kont an amzer, pe al labour, euz petra e veze ano ? Gwechall n'oa nemed an dud pinvidig hag a helle diorren da vad o spered, mond da zelaou koñferansou pe beziou-c'hoari, selaou muzik... an oll a hell bremañ kaoud kemend-all gand eur post radio. Ar sinema e-unan, ma karom kompren mad ar filmou, a hell or zikour da zizelei troiou kuzet spered ha kalon an den.

Diwar an dra ze ne vo ket mui or spered ken striz, êsoh e vezo deom kompren ar re all, hag en em glevet ganto, zoken gand ar re ne zonzont ket eveldom...

Esoh eo ive santoud eo oll dud ar bed euz ar memez familh : ar broiou pella o-unan a zeblant beza tostoh deom goude kement a ouzom diwar a 'fenn, dre ar hazetennou, ar radio, ar sinema...

Ar radio a ro da glevet deom mouez an Tad Santel ar Pab, preze-gennou displeget da zul, kelou eus gouelioù braz an Iliz. Ped ha ped a gristenien lezireg, pe a dud difeiz, a gavo aze hent ar zilvidegez...

Med gand an doareoù nevez da embann ar menozioù, e teu, siwaz ive, war eun dro, gwirionez ha gevier, vertuzioù ha torfejou, unvaniez ha dizunvaniez, karantez ha kasoni.

Ezomm a zo eta da deurel evez !

Ma sellom mad, n'eo ket diêz gouzoud petra 'zo o ren ar bed : an arhant, an udurnez, an ourgouilh... War dachenn an embannerez e reont o mistri hag e kavom ar pehed euz eur penn d'egile. Evid gounid atao muioh a arhant e vo skrivet, e vo diskleriet, e vo diskouezet beteg an traou euzusa. Gand ma teuo arhant, ne vo klasket nemed maga techou fall an den...

Ha setu perag peb kristen a dle en em zoñjal evid gouzoud peseurt komportamant a vo e hini dirag ar hazetennou, ar radio, ar sinema... Digeri an daoulagad, poueza mad peb tra : setu ar pez zo dleet ober...

## Devez kaer Sakridigez on Aotrou 'n Eskob Fave

Eun hekleo gwall bell ha divlaz e vo hemañ euz an devez kaer m'eo bet sakret on Aotrou 'n Eskob Fave. Dleet eo, koulskoude da « Bleun-Brug » rei « lodig ar pardon » d'ar re euz e lennerien n'o-deus ket bet an eurvad da weled ar gouel, pe da lenn er journaliou, eun dra bennag diwarbennañ.

Eun devez baradoz eo bet an devez-se. Gér ebed eta, e yéz ebéd, hag a ve gouest d'e daolenna. Levenez diabarz eur galon n'hell ket beza merket na gand gerioù na gand luhskeudennou.

Eur « Sakr » eo bet hemañ, disheñvel, marteze diouz ar re all, da vianna, evidom-ni Bretoned, ha muioh c'hoaz, evidom-ni Bleun-Brugerien. Eun tam-mig digoll eo bet, a dra-zur, euz an oll drubuilhou on-eus bet hag on-eus c'hoaz da houzañv, en abeg d'ar stourm ken diêz a renom evid Feiz ha Breiz.

Breiz-Izel a-béz, beteg en tu all da harzou on eskopti, eo a dride, en deiz-se, dindan holzou Iliz-Veur Kemper. Edom evel distroet e penn kenta an Iliz, e penn kenta or Breiz, pa veze dibabet an eskibien gand ar hobl, e-touez he bugale dosta, evid beza he zadou : Sant Korantin, Sant Paol a Leon, Sant Tugdual... ha pet all, a zo bet euz ar re-ze.

Ne gredan ket beza pell diouz menoz on Aotrou 'n Eskob Fauvel, na diouz menoz on Tad Santel ar Pab, o kredi o-deus bet o-unan soñjet e kemend-all, pa 'z eus bet ano da rei eun eskob skoazell, da eskopti Kemper ha Leon.

O rei deom da eskob unan euz or gwad, unan heñvel ouzom, hag e-neus evel dom desket ar brezoneg war barlenn e vamm ; unan hag a zo bet evel dom savet e-kreiz or mêziou ; unan hag e-neus, evel dom, sunet e zeskadurez en or skolioù e ser beva dalhmad e-mesk an dud ; ar re a boagn, ar re a houzañv, ar re a béd... ; o rei deom, ya, da eskob, unan hag e-neus or spered, or gizioù, or perziou mad koulz hag or perziou fall, ez eus bet greet deom oll eur blijadur dreist ordinal, dre ma 'z eus bet gouezet lakaad da dregerni, neudenn gizidika or halon.

Ar blijadur, ar joa-ze, a zo bet en em zispleget splann da 'fin an Ofis sakr, pa dregernas « *Kantig ar Baradoz* », méd dreist oll, an « *Te Deum* » ha « *Da Feiz an Tadou koz* », keid ha ma tiskenne bennoziou kenta an Eskob nevez war ar hobl a-bez o tridal, o youhal he levenez dirollet... « *Ya ! deoh Aotrou 'n Eskob, hag ennoh da Feiz on Tadou koz, ni zalho mad atao !* »

Ha ma strake ken waz al levenez war an douar, sur on, er Baradoz e strake muioh c'hoaz. Hag e seblante din gweled, stouet a-uz deom war garidou an Neñv, ar re a zo bet on Tadou hag a gerzom war o roudou : oll zent koz or bro bodet en-dro da zant Erwan, da Vikael an Nobletz, d'an Tad Maner, hag ive en o zouez, an Aotrou Perrot, Erwan ar Moal, an Ao. Batany, an D<sup>r</sup> Liberal... ha ped ha ped all !!

Evel da zeizioù kaerra ar Bleun-Brug, eme « *La Croix* » edo an dud leiz ar ruioù oh ober enor d'an eskob nevez p'edo o vond euz an iliz-veur da di ar Retred.

Hag eno, nag a vall da bokad d'e walenn ! Pep hini a glaske tostaad outañ, houmañ euz Skaer, gand he haerra gwiskamant, hennez pe honnez euz an Y.K.A.M. gwechall, egile euz Lesneven, re all euz Kastell-Paol, euz Kleder... Ne vije bet fin ebéd, anéz ar préd a oa ouz e hortoz er Hloerdi-Braz.

E-douz ar préd, goude bennoz Doue an Aotrou 'n Eskob Fave d'an oll gouvidi, e oe douget kalz yehedou. Or prezidant, an Ao. Gab ar Moal, eo a zigoras an abadenn. Kinnig a reas gourhemennou ha bennoz Doue ar Bleun-Brug d'an hini a renas kammedou kenta ar gevredigez goude ar brezel, hag a viras outi, gand kemend a nerz, da vond war henchou riskluz ha troidelluz.

E-touez ar re all a gomzas, meur a hini, dreist oll an Ao. de Guebriant, an Ao. Monteil, depute-mêr Kemper, hag an Ao. 'n Eskob Fauvel a verkas splann labourioù breizeg an Ao. 'n Eskob Fave, hag a bouezas war talvoudegez herez sakr on Tadou, en eur veuli labour ar Bleun-Brug.

Eno Edon.

## D'an aotrou 'n eskob fave

gand mab an dig

*E-pad ar pred a vodas, er hloerdi braz, oll vignoned an Aotrou Favé, an deiz m'oa bet sakret eskob, kalz prezegeñnou kaer hag helavar a oe displeget. Ar boked kenta kinniget dezañ eo pezh-barzoniezh MAB AN DIG a lakaom amañ war-lerh, hag a zo bet lennet gand ar Breur Visant Séité.*

Eur wech... o ! pell 'zo abaoe

E teuas Doue

En eun ti euz or Breiz

Ennan bugaligoù eleiz

Dezañ eul lagad lemm hag eur galonig hlan :

« Ar gwiniz, 'me Zoue, a zirilh er mêziou

Dre ziuwer mederien d'e gas d'am grignolioù. »

✱

E iliz veur Kemper, eun dervez d'ar mintin,  
Eun Eskob a hiz koz, heñvel ouz Kaourintin,  
E zaouarn o krena, a lakeas da ziskenn

Warnañ spered ar sklêrijenn,

Galloud an Ebestel. An Eskob a zavas

Ha d'ah eoster nevez an Eskob a bokas.

✱

E-touez ar greun mad e save roz-aer  
Ha dreog hag askol e tachennou Skaër.  
Er beure, hed ar hor, hag e sked

Ar stered,

Bemdez e labouras... ya... war gorv e roched,

Eur moushoarz war e zremm e-kreiz ar pennoù éd,

Hep chal

Ouz houezenn e dal !

✱

Zokén e Breiz-Izel, ar paour-kêz yaouankiz  
A glaske henchou all e leh hent an iliz.  
Setu o tregerni evel eur biniou

E gomzou

E strad ar halonou ;

Hag oh en em voda

War e dro 'n eur gana,

Eur yaouankiz nevez,

Kaer evel dantelez,

O tond d'an ilizou

Sounn o 'fennou

Ha glan o halonou.

✱

Er sioulder teñval, e lavar e bedenn  
Evid tud e barrez, e iliz Lesneven...  
Ha setu o tiroll kleier kaerra or bro.  
Dantelez a grouas... dantelez en nezo.  
Iliz-veur Kastell-Paol hag hini ar Hreiskêr

« Zo bremañ d'an eoster,  
D'an eoster sebezuz, liammet en e greiz  
Karantez e Zoue gand karantez e Vreiz.

Hag eun deiz,  
Da Vreiz astennet,  
Dinerzet,  
Person Kastell

A gemenn sevel,

Hag e sav, hag e kerz, dispak he bannielou,  
Tro-war-dro d'an touroiu,

Mezvet gand soniou drant ar hleier o vralla,  
Biniou an dañsou... yaouankiz o kana.

\*\*

Er goanv he hadas. Setu er parkeier,  
En or broïg a-bez, sked an nevez-amzer.  
Krouer an dantelez a zo galvet da rén  
Ar re 'zo diredet a beb tu d'e gichen,  
Dindan galloud eun Tad a gar or Breiz-Izel  
Hag a garam kement, o ! ya, Aotrou Fauvel...  
Eñ ive 'vo eskob. Evel sent koz ar bro,

E reno

An arad en ero.

Ha ni, fougenn ennom, gand eur mestr ken dispar,  
A labouro noz-deiz da gempenn on douar

Gand eskob Andeda.

Ano euz ar haerra.

Heñvel ouz sant Dendan,

An den tan...

On tud-koz deom-ni

A deu euz an Azi,

Hag an ano-ze,

Marteze,

'Zo breizad ive.

An ano a zen-tan, c'hwil, Eskob Andeda,  
Hen dougas, hen dougo... bepred euz ar gwella !



# Lokrist - an - Izelvéd

Aotrou Lokrist-an-Izelved,  
Ho pet soñj euz ar Vretoned.

Gwechall, pell amzer a zo abaoe avad, d'ar mare ma oa distag eskopti Leon diouz hini Kemper ha m'o devoa Leoniz eun eskob dezo o-unan e kêr goz Kastell-Paol, e oa brudet braz, dre Vreiz a-bez, leh santel Lokrist-an-Izelved, e parrez Gwinevez. El leh-se moarvad se e oe savet, gand Bretoned an degved kantved, eur manati en enor d'an Aotrou Krist, goude m'e-noe Even ar Braz, kont Leon, roet lamm d'an Normaned pennou touz, e Kerlouan pe e Gwinevez. Med pell a oa e oa kouezet mogerioù ar volster en o 'foull ha ne oa mui eun elfenn-soñj euz ar veneh hag al leaned a oa bet o chom enni. Ha koulskoude, e-pad kantvedou diwezatoù, ne oe ken ano nemed euz ar burzudou a weled eno hag a zo deuet an hekleo anezo beteg ennom, pa 'z eo gwir em eus eñvor da veza klevet, war-dro tregont vloaz 'zo, va mamm ha va maeronez o komz euz an traou souezuz-se hag o kana, war don *Koadri*, darn euz pozioù « *Kantik Lokrist-an-Izelved* ».

N'eo ket eur hantik e oa hemañ e gwirionez, eun doare gwerz santel avad ne lavaran ket, pe eun dezrevell savet e gwerzennon evid ober d'ar gristenien derhel soñj êsoh a ze euz darvoudou hag o devoa lakeet tud an amzer-ze d'estlammi ha da zêbezi.

Evel eur vorenn o teuzi a-nebeudou e oa êt kuit euz va spered an eñvor euz ar pezh am oa bet klevet er gêr diwarbenn Lokrist, ha d'am meno eo dibaoet bremañ, e Kerne da vihana, ar re a oar hoaz eun dra bennag euz ar burzudou sabatuuz a lakeas kement a gaozioù da redege e-touesk or henvroiz. Med n'eus ket pell, e-ser furchal e-touesk paperioù koz, em eus diskoachet gwerz Lokrist-an-Izelved, hounnez eeun-hag-eeun hag a zeue ar marsoñj anezi da droidella leb eur mare em spered, evel eun huñvre, da heul va eñvorioù-yaouankiz. Ha, gand dudi, em eus adlennet an istor santel evid e gonta deoh evel ma 'z eo bet c'hoarvezet.

\*\*

E Lokrist e oa eur 'feunteun, sklêr, fresk ya yahuz an dour enni, evel e-barz an oll 'feunteunioù a zo e Breiz. Darempredet e oa gand eun niver braz a dud euz a gement tolead a zo en or bro. Gwelet e veze o vond beteg enni Leoniz, Paganiz, Tregeriz, Plougastelliz, Kerneviz euz Menez-Are, Glaziged ha Bourledenned, Rouziged, Dardouped, Drandoueed ha Bigoudenned, Kaperien ha Kapenned, Meleniged, Madenned, Gwenedourien ha Gallaoued, kouerien ha moraerien, Argoadiz hag Arvoriz.

Darn anezo a oa yah ha dibistig med darn-all avad, al lodenn vrasa heb mar ebet, ne oant nemed tud klañv ha mahagnet, kamm, dall, mud, born, mough ha tort, pe o chaina gand eur hleñved-langiz bennag. Ar re genta a veze o vond da drugarekaad an Aotrou Krist da veza bet truezuz en o heñver pe e-keñver o zud, pe hoaz d'E bedi da rei ar pare d'o herent ha d'o mignoned. Re an eil rumm a gerse da houlenn beza pareet o-unan ha diboaniet euz an droug o gwaske didruez ha dizamant.

Euz pell-braz e teue kalz anezo, hiniennou war gezeg hag ar re-all war o zroad, meur a hini euz ar re-mañ diskabell ha diarhen. Eur feiz virvidig a bare en o daoulagad, hag o muzellou, o pedi dibaouez, ne ehanent ket da fiñval, endra ma tremene greunennou o japeled etre o bizied krohetet rust ha kaled. Donq a raent a beb tu, hiniennou o-unanig ha darn-all a-gevred, lod laouen ha sichant dezo ha lod-all reuzeudig ha truezuz o stad, gand ar mahagn hag ar hleñved, ar gouliou, ar pagn hag an astuz. Kalz euz ar bardonerien-ze ne oa nemed truilhous ha pilhou en dro dezo ha, dre doullou o dilhad, e weled ar gou-

liou euzuz a grigne o horvou kastizet ha gwan, hag o hrohen spinahe' gand ar rust-amzer hag ar hleñved. Meur a hini en em stleje ruz-diruz war goust o bizier-loaieg pe o 'flahou, hag a-veh o diveze greet eun nebeud kammedoc'h e rankent chom da ziskuiza a-barz paka o anal a-nevez. Med oil e kerzent gand mall ha gand fiziañs, o halon leun-barr gand an anaoudegez-vad pe gand an esper da gaoud o goulenn.

Pe seurt vertuz souezuz he devoa feunteun Lokrist, eta, pa lakee eun niver ken braz a dud da dostaad outi gand kement a hast, evel pa vefe bet he dour un dour a vuhez a gomzer kement anezañ dre ar bed a-bez ? Eur perz burzuduz he devoa ar feunteun rag, eur wech bemdez, e roe ar pare d'eur hlañvour pe d'eun den mahagnet. Lakeet e veze an hini tohor e-barz eur homm pe eul laouer vên hag a zo atao du-ze, war a leverer, e bered an Aotrou Krist. Neuze ez ee unan-bennag da leunia eur zailh, gand an dour a rede euz ar 'feunteun dre eur gorzenn gaer, hag eur beleg gwisket e gwenn, ar zakr hag ar stol en e gerhenn, a zeue da walhi an hini klañv. Kerkent, dre hras Doue, e save hemañ en e zav en eur drugarekaad or Zalver benniget a vouez uhel : pare ha dihloaz e veze ha yah-pesk koulz a gorr hag a ene. Techet e vo darn, marteze, da ziskredi d'am homzou, med arabad d'ar pennou aheurtet-se soñjal ne gontan dezo nemet sorhennou, rag, eme ar werz koz :

*N'eo ket fablou eo an dra-mañ,  
Ar wirionez a lavaran :  
Kement a veze aflijet  
E Lokrist a gave yhed.*

Brud Lokrist hag ar burzudou a hoarveze eno ne zaleas ket d'en em skigna e-barz ar vro. War gresk ez eas bemdez niver ar birhirined hag an dud tohor ha mahagnet a zirede di. Ar re-mañ, o weled pareañsou sebezuz dirag o daoulagad, ne vezent ket evid ober o'menoze da guitaad al leh santel a-raog beza bet diboaniet o-unan. Hag e choment eno da hedat o zro da veza gwalhet el laouer vên gand dour euz ar 'feunteun yahañ. Med red e veze dezo gortoz pell-amzer a-wechou rag, hel lavaret em eus hoaz, ne hoarveze nemed eur burzud bemdez.

Neuze e oe enkrezet tud Gwinevez gand ar zoñj e hellje eur seurt engroez lakaad ar gernez da zond ar vro, o veza ma 'z ee kalz boued ganto. Hag, eun devez, e teuas eun nebeud gwazed, gand o benviji, da holei ar feunteun vurduduz ha d'he huzad dindan an douar. Hag, hirio an deiz, ema-hi, hervez klevoud, dindan leurenn iliz al leh santel. Med abaoe ma 'z eo bet klozet evel-se ez eo bet dilezet a-nebeudou ha, daoust da barrezianiz Gwinevez da veza troet bepred d'he darempredi, ez eo bet ankounac'heet gand ar Vretoned-all a-ziabell. Ha, koluskoude, n'eus ket eul leh santel all ken koz hag hemañ war zouar Breiz ; atao ema eno al laouer vên a zo bet test euz trugarez ha madelez an Aotrou Krist e-kenver an dud poaniet ha glaharet.

Tud doaniet hag ankeniet, tud drastet ho korf gant ar hleñved pe gwanet hoh izili gand eun droug bennag, it gand fiziañs da Lokrist hag ho po frealz d'ho merhed ha diveh d'ho poaniou ! E leh-all ebed n'e-neus bet roet or Zalver grasou ken puilh d'ar gristenien rag, evel ma lavar deom ken eeun ha ken diwidre ar werz koz, « evid kompren ar burzudou a zo bet gwelet hag a weler atao e Lokrist, evid o displega hag o skriva e vefe kalz re-nebeud eur miz hanter ». Rag, e-touesk an oll draou kac'h a zo bet c'hoarvezet eno, setu amañ eun darvoud dispar hag a roio testeni euz galloud trugarezuz ar Hrist benniget.

## penedourez<sup>(1)</sup> lokrist an izelved

E Lokrist-an-Izelved, eur mare a zo bet, e oa eun ozah hag e bried o veva. Tud a zoare hag a zoujañs Doue e oant o-daou, hag ar wreg a oa madelezuz ouz ar beorien. Eun devez, koulskoude, e teuas eur paour da glask an aluzenn d'he zi hag e nahas rei dezañ an disterra tra. N'edo ket war he zu mad evid doare

ha, marteze e oa bet heget ha brouezet gand eun dra bennag kontrol d'he zoñj. Heb koll kalon evelato, ar hlasker-bara heb aspedas da gaoud truez outañ an an' Doue.

« N'em eus ket amzer da goll ganeoh », emezi, « rag oh aoza boued emañ eun dour va zi ha, dizale, e teuint da glask o 'fred. Evid bremañ, kit en ho tro ; eur wech-all e roin deoh ho c'hoant ».

Med ar paour kôz a oa dare da ziflaka gand an naon ha, gand eur vouez truezuz hag o krena : « Roit din eun tamm boued mar plij », emezañ, « ezomm braz am eus da zibri. N'em eus bet tamm abaoe pell 'zo ha va halon a zo war-nez serri gand an disvoued. Bezit madelezuz em heñver, en ano an Aotrou Krist, pe bremañ e varvin amañ gand an dienez. »

Droug yeas er wreg hag e respontas d'ar paour : « It ahan diouz toull va dor pe va hi braz a zistagin hag hennez a raio deoh kerzoud kuit ». Ne zentas ket an den reuzeudig dioustu hag e chomas d'aspedi ar vaouez aheurtet da rei dezañ peadra da derri e naon, med houmañ a yeas neuze en egar. Raktal e tilammas da zistaga he hi hag hen isa a reas ouz ar hlasker-bara. Med, e-leh ober droug dezañ, ne reas al loen nemed e houesa hag e lipad.

Ar paour, o weloud pegen didruez ha pegen dihrad e oa ar wreg en e geñver, a bellaas diouti en eur hirvoudi hag oh en em ruza gand poan war goust e vaz. Pa oe en em gavet e-kichen an nor-borz, e kôuezas a-slok e gorr war an douar hag e laoskas eno e huanadenn ziweza. Eur hi-all a oa deuet da gavoud hini an ti, hag o-daou e chomjont da chilpat klemmuz en dro d'ar horv maro heb kredi touch outañ.

Neuze, eme ar werz koz :

*Pa zeuas tud an ti d'o boued,  
Koz ha yaouank ' oent estonet  
O weloud an den-se maro  
Heb kristen ganet war e dro.*

Chomet e oa ar horv dirag toull an nor-borz gand an daou gi en e gichen, ha kement-se a oa eun dra iskiz ha strafuilhuz. Pa glevas ar wreg petra a oa o paouez c'hoarvezoud e tiskordas da ouela ha da geuzia d'ar pezh he devoa grêt. « Siwaz ! » emezi, « me a zo kirieg d'ar gwalleur-mañ. Ar paour kaez-mañ a oa deuet da houlenn an aluzenn diganin hag, e leh kaoud truez outañ em eus distaget ar hi braz evid e gas diwar va zro, ha lazet eo bet gantañ heb mar ebed ».

Dond a reas kalz tud da weloud an hini maro ha klasket e oe gouzoud petra e-nevoa grêt dezañ mervel. Med ne oe ket kavet goulid ebed en e gorr ha dizale e oe sebeliet. Ar wreg madelezuz, en keñver an nesa, a roas, heb keuz ebed, eur roched hag eul liñser evid e liena. Kaset e oe ar horv d'interi da Winevez hag eun niver braz a dud, mantret gand ar gwall-zarvoud, a heulias an arched beteg ar vered. Paet e oe ar veleien gand ar wreg kabluze ha lakaad a reas, ousspenn, kana servichou ha pedi Doue evid ar hlasker-bara et d'ar bed-all.

Pa oe deuet d'ar gêr euz an interamant e kavas ar vaouez, war an daol-voued, an dilhad hag an arhant he devoa roet. Ar strafuilh a grogas enni hag ez eas kerkent da govez. Med re-vraz e oa he fehed ha beleg ebed n'heñ absolvas : da Rom e rankje mond da govez gand ar Pab ha da houlenn ar pardon digantañ. Prometi a reas mond beteg ar gêr heñ-ze hag ouz he zud e houlennas aotre da gregi gand he beaj.

« Va 'fried », emezi, « klask a rin an tu d'ober va zro heb dale re-hir hag a-barz nebeud ac'han e teuin en-dro d'ar gêr ». Med he gwaz a lavaras : « Di e hellan mond ivez kerkent ha c'hwil ha, ma 'z a unan ahanom, ez aim on daou, rag n'eo ket d'am madou am eus damant ».

Eur mab he devoa o tena ; gand teneuredigez ha rann-galon e pokas dezañ ha d'he merh hena, hag e kimiadas diouto. Neuze e kuitas an daou bried o zi en eur gas ganto eun doublenn vara.

Pa oent eet eur pennad mad diouz ar gêr, e tigouezjont gand eun nebeud tud war an hent. A greiz-oil e reas van ar wreg d'en em jala hag e lavaras d'he

(1) E galleg : pénitente.

gwaz a vouez uhel dirazo : « An arhant ho poa roet din, va 'fried paour, am eus laosket er gêr war an daol. It d'o herhad, mar plij, ha me a jomo amañ d'ho teport ».

Distrei a reas an ozah war e giz ha, pa zeuas en-dro d'al leh ma oant en em zispartiet, n'edo ket e wreg eno ouz e hortoz, rak eet e oa en he roud. Ankeniet-braz a oe ar paour kêz den hag eh en em lakeas da leñva ha da geuzia dezi ha, goude beza he hlasket a beb tu, ez eas en-dro d'ar gêr, sammet ha gwasket e galon.

Allas ! pebez dizesper ha pebez tristidigez ! Pemp bloaz warnugent a dremenias a-barz ma klevas ano ebed anezi ha, dre hir-amzer, e teuas d'heh ankounac'haad hag e kemeras eun eil pried. M'e-nivije gouezet, siwaz ! ne oa ket maro e wreg kenta ne vije ket eet e-dra-zur da zimezi a-nevez rag glahar a-walh e-nevoe hoaz goude.

Hervez *Kantik Lokrist-an-Izelved* :

*Ar wreg, e Rom pa erruas,  
Dirag ar Pab en em strinkas  
Da houlenn outañ pinijenn  
Hag euz he 'fched absolvenn.*

Gourhemenn a reas an Tad Santel he has d'ar *gambr a binijenn*, e-leh ma veze lakeet ar beherien vraz. Digaset e oe d'ezhi dour ha bara a-walh da zibri ha d'eva e-pad tri devez ha lin a-walh da neza e-pad an heveleb amzer.

Med siwaz ! ankounac'heet e oe eno ha pell braz goude, pa zeuas soñj anezi d'ar re a oa bet ouz he hloza el leh-se, e kredjont e oa maro. Digoret e oe warni hag e oe kavet, a drugare Doue yah ha dibreder hag o neza. Dond a reas neuze er-maez euz ar *gambr* hag ar Pab a roas dezi an absolvenn.

Gand eun den koz eh en em gavas goude, hag hemañ a houlennas outi izeleg hag hegarad : « Euz a be leh e teuit, va mignonez ? Biskoaz n'em eus ho kwelet dre amañ ha kredi a ran n'oh ket ac'han ». Hag ar benedourez, oh e glevoud, a respontas kerkent : « Ne nahin ket lavaroud deoh kement-se, va den mad. Me a zo euz Lokrist-an-Izelved, e Breiz-Izel, e-leh m'edo ivez va 'fried ha va bugale. Kalz glac'har am eus greet dezo rag ranket em eus o huitaad, ha kredi a ran e karfent va gweloud adarre ».

— Mar kirit distrei daveto », eme an den koz, « a-barz nemeur, dre bras Doue, eh en em gavoh en ho pro. Dizale e weloh ho pried hag ho pugale hag e helloh o briata hag o 'frealzi. Neuze...

*Pa erruoh en Izelvet,  
E ti 'n Aotrou Krist benniget,  
Grit va gourhemennou dezañ,  
Livirit da Grist her haran...*

rag me eo al halvez e-neus greet E skeudenn a zo du-ze e-barz E iliz.

« Eur walenn wenn am eus amañ hag hounnez a roin deoh. Hoh heñcha a raio bepred hag, a-barz pell, ho kaso beteg ho kwaz hag ho taou vugel. »

Ken difrae e kerkas ar benedourez ma 'z eas prim-tre d'he bro, renet ha bleniet gand ar walenn wenn. Mond a reas da di he zud hag, heb rei da houzoud piou e oa, e houlennas gand eun neuz kaezig ha lent beza lojet. Gwreg an ti a oa otuz ha dicheg ha kerkent e lavaras : « Evid amañ ne lojoh ket ; it ahan pa geroh ».

Komz a ree evel-se o veza n'edo ket an ozah er gêr, med ar vugale, eur plah hag eur beleg yaouank, o klevoud ar vaouez dianvez-se o houlenn lojeiz ken truezuz-all a oe tizet o halon hag a reas dezi dont tre, en desped d'o lez-vamm. War eul laouer vaen eh azezas hag e lavaras e karfe beza laosket da vond enni da ziskuiza.

Ar verh, en eur vond hag en eur zond dre an ti, a gomze a vouez izel ouz he breur beleg. « Lakeet oun souezet braz gand ar vaouez-mañ », emezi, « hag ouz he gweloud em eus poan-spered. Ken heñvel he havan ouz ar vamm he

deus or ganet ma n'oun ket evid miroud ouz va gwad da domma oul ». Kui-taad a reas ar beleg toull an nor e-leh m'edo neuze, ha, gand doujañs, ez eas beteg ar vaouez hag e krogas en he dourn. E-tal an tan e oe kaset gand he daou vugel hag ober a rejont dezi azeza e-leh ma azeze peurvuia he mab.

Ar verh, en eur druezi, a zeuas da walhi dezi he zreid hag, o weloud e oa eur merk en he gar : « Heb ehan », emezi d'he breur, « e lavar va halon d'in eo ar wreg-mañ he deus or ganet ; kleizennet eo ivez he morzed evel ma 'z eo hini or mamm ». Ober a reas ar beleg an neuz da jom dizeblant, ken na oe aozet koan, med neuze e roas e voued d'ar vaouez diañvez.

Feuket-braz e oe al lezvamm gand an dra-ze hag e lavaras d'he lezvab : « Ne rafeh ket kement-se a stad ahanoun na, kennebeud, euz ho tad ». Med hemañ, heb teurel evez er homzou oazuz-se, a gendalhe da gemeroud preder gand ar wreg paour. Pedi a reas e hoar da veza madeleuz outi hag aketuz war he zro. « Digasit dilhad d'ezhi da jeñch », emezañ, « a-raog ma 'z aio da gousked. E-barz va gwele e tiskuizo, rag heno e chomin war-zao da bedi Doue da rei din ar hras da ren eur vuhez vad ha santel. »

Laouen-braz e oe ar plah yaouank o klevoud ar homzou-ze, ha kerkent ez eas d'heh armel da gerhad dilhad hag eun hiviz nevez-flamm. O rei a reas d'ar vaouez da lakaad hag e oe gwisket dereatoh e-giz-se. Neuze ez eas ar hoar da lavaroud d'he breur : « Houmañ eo or mamm heb mar ebed, rag kredi a ra din heh anavezan ». Hag ar beleg a respontas : « Soñjal a ran ivez evelдох, med red eo kemeroud pasianted. Gand an amzer e teuim a-benn da houzoud piou eo ». Kousked a reas ar vaouez e gwele ar beleg trugarezuz hag hemañ a jomas da bedi e-pad an noz.

Pa oe digouezet an ozah er gêr e tisplegas dezañ e eil pried, gant mall, ar pez a oa en em gavet. « Eur mab beleg hoh eus amañ », emezi, « ha, war a welan, ne raio fin vad ebed. Eur vaouez a zo bet digemeret gantañ ha gand e hoar en ho ti ha lakeet eo bet da gousket e gwele ho mab. Ma n'am hredit ket e hellit mond da weloud. »

An ozah paour, droug ennañ, a bignas raktal d'ar zolier. Pa welas e oa gwir ar pez he devoa lavaret e wreg, e tilammas da gavoud e vab. « Va mab beleg », emezañ, « petra a zoñjit 'ta ? N'eo ket mad da dud a seurt deoh ober ar pez a rit ». Ar beleg a oa o pedi hag ar rebechou-se a hlozas d'ezañ e galon. « Tavit, va zad », a respontas eñ « m'am eus greet kement-se eo abla-mour da Zoue...

*List va lezvamm da lavared  
Ar pez a garo da brezeg ;  
Neb a loj a vezo lojet,  
Ober errad atao 'zo dleet.*

Frealzet e oe an tad gand ar c'homzou-ze hag e tiskennas en traoñ, didaeret ha siouleet dezañ.

Antronoz-vintin ez eas ar vaouez paour da rei da verh an ti an dilhad he devoa prestet dezi. Med ar beleg a lavaras d'he hoar : « Dilhad a-walh hoh eus, va c'hoar ger. Laoskit ar re-mañ, en an' Doue, gand unan baourroh egedoh ». Hag ar verh, ken trugarezuz hag he breur, a bedas ar vaouez da viroud an dilhad-se. Houmañ o zrugarekas euz a greiz he halon hag a houlennas ouz ar beleg hag eñ e-nefe ar vadelez da glask unan bennag d'he hovez an deiz-se. « O ! ya sur ha laouen-braz », emezañ. « Pa zeuio ar veleien d'an iliz e kavin unan d'ho kovez ha d'ho komunia. Goude e tijunioh amañ ha, mar kirit ober plijadur din, e teuh bremaig d'am overenn genta ».

— D'hoh overenn-bred nevez ez in sur », a lavaras ar wreg diañvez, med komunia ne rin ket ken na vo bet kanet ganeoh. »

— Re-bell e vefe ret deoh chom war yun », a lavaras ar beleg yaouank, « rag hir-mad e vo an ofis. Arabad e teufeh da gleñvel evid beza dioueret ho pred-mintin, rak-se komuniit ha dijuniit a-raog ».

— Ne rin nag an eil tra nag egile », emezi. « C'hwil eo a 'fell din dam homu-nife, goude m'ho po kanet hoh overenn genta ».

Kerkent ez ajont d'an iliz hag ar beleg yaouank a gavas dezi eur hovesotir. Er gador a binijenn eh anzavas ar vaouez piou e oa hag e roas kefridi d'he zad kovesour da ziskleria kement tra d'he mab, kerkent ha m'e-nefe hemañ overrennet ha roet dezi ar gomunion.

Eun engroez braz a dud a oa en iliz pa bignas ar beleg yaouank, gand eun avieler hag eun abostoler a beb tu dezañ, ouz an aoter vraz da gana e overenn genta. Lidet a oe gand ton ar sakristis santel ha, war-lerh an « Ite missa est », e oe gwelet ar vaouez dianvez o tostaad hag o taoulina gand ar vrasa doujañs ouz ar splend. Dond a reas ar beleg da rei dezi an drailhennig vara kan lakeet da drei e korv or Zalver gand ar homzou burzuduz e-nevoa lavaret da vare ar gorreou.

Neuzé ez eas ar wreg paour da zaoulina dirag skeudenn mab Doue hag eh en em lakeas da bedi kaloneg. Goude e savas he mouez hag e komzas evel-henn : « Plijet ganeoh va hlevoud, c'hwil Krist benniget, va mestr ha va aotrou ! Gourhemennou am eus d'ober deoh a-berz eun den koz a bell-bro. Eñ eo ar halvez a gizellas hoh imaj, ha va 'fedet e-neus da lavaroud deoh e-neus evidoh ar vrasa karantez ». Teir gwech leh-ha-leh e tistagas an heveleth komzou hag ar Hrist, evid rei dezi da houzoud moarvad e-nevoa klevet, a stouas e benn war e vruched hag abaoe ez eo chomet evel-se.

*Evid trugarekaad ar wreg-se  
E reas an Aotrou Krist an dra-ze,  
Ha diskouez d'an oll dre E hras.  
E oa ar wreg-se santel braz.*

A-greiz m'edo ar beleg yaouank er zakritiri o tiwiska e zilhada-overenna, e teuas an tad kovesour da lavaroud dezañ ar pezh a oa bet karget da ziskleria gand e benedourez. « Ar vaouez emaoñ o paouez komunia », emezañ, « eo ar vamm he deus ho lakeet war an douar. Kement-se he deus anzavet ouzin, rag ne grede ket hel lavaroud deoh gand aon d'ho trubuilha, c'hwil hag ho c'hoar ».

Pa glevas ar beleg ar homzou-se, e oe leun-barr e galon gand al levenez hag an deneredigez. Dilammad a reas da gavoud e vamm, a oa atao o pedi dirag skeudenn an Aotrou Krist, ha d'he briata gand karantez.

Evel eur merk pe eun testeni anad euz an darvoudou souezuz a oa c'hoarvezet ganti, edo hoaz gand ar vaouez an dilerh euz an doublenn vara he devoa kemeret evid mond da Rom, hag an tamm bara-ze, e leh beza seh ha louedet, a oa ken fresk ha ma vefed bet o paouez e denna er-mêz euz ar 'forn. En he dourn e oa ivez eun-tamm paper ha ne oa bet lennet gand den biskoaz beteg neuze. Med ar mab beleg e gemeras diganti ha, goude beza gwelet petra a oa warnañ, e chomas sebezet-oll. War ar paper-se he devoa ar vamm reuzeudig lakeet dre skrid he buhez penn-da-benn hag an digouezioù souezuz a oa bet en em gavet ganti.

« Allas ! mamm baour », eme ar beleg, « n'em boa anaoudegez ebed euz kement-mañ ha ne oan ket evid gouzoud ez oh ar vaouez he deus va ganet ».

Ken braz e oe o levenez hag o eurvad, ma kouezjont o-daou war al leh ha ma nijas o eneoù d'ar Baradoz da dañva an eürus : ed peurbaduz a zo prometet gand Doue d'an dud santel hag a youl vad.

Pa oe kaset kelou euz maro ar vamm hag ar mab d'an ozah ha d'e verh, edo an daou-mañ o pourchas o 'fred d'an dud a oa bet pedet da zond da leina en enor d'ar mab beleg. Diredeg a rajont kerkent, ankeniet-braz, etrezeg an iliz, med en hent e kouezjont ivez war an douar ha, dirag an oll, e varvjont eno ken behiet e oa o halon gand ar glahar. Strafulhet ha spontet e oe an dud o weloud o vervel, en heveleth devez, an tad, ar vamm hag o daou vugel.

Dizale goude e oent sebeliet ha kaset, gand kalz enor ha doujañs, d'interi da Winevez, ha tri anezo a oe lakeet eno en douar benniget : an ozah, e verh hag e vab beleg. Med, tra sebezuz ! p'en em gavas e-tal dor ar vered ar harr m'edo ennañ korv ar vamm, e listroas krenn al loened a oa sternet outañ ha den ne oe gouest d'o lakaad da jom a-zav.

Neuze e lavaras an dud-a-iliz o leuskel da vond d'al leh ma plijfe gand Doue e vefe beziet an hini varo. Dirag dor-borz bered Lokrist-an-Izelvet e paouezas a greiz-oll al loened da gerzoud, hag ar horv a oe tennet er-mêz euz ar harr ha douget kerkent d'an iliz.

Raktal e kouezas ar zabatur war re o devoa heuliet an arched. Oll e weljont, gand estlamm, an Aotrou Krist o tiskouez gand E viz, dindan E dreid, al leh ma flee beza douaret ar horv. Hag eno e oe lakeet gand kalz enor ha stad, endra ma pede kaloneg an ilizad tud a oa bet test euz eur burzud ken braz.

A-benn eun niver braz a vloavezioù goude e oe digoret ar bez hag e kavjed e-barz an arched ken yah ha m'edo da genta. Tennet e oe ahano heb m'e-nevoe an disterra droug, ha abaoe eo bet miret e ti an Aotrou Krist benniget.

Hag, evid echui, setu amañ ar gentel hag an aliou a ro deom *Kantik Lokrist-an-Izelvet* :

*Nep a glevo an istor-ma,  
Emaoun o paouez displega,  
'Zo krisoh eged an tigred  
Ma ne vez e galon tizet.*

*Pa zewy tud paour da dal ho tor,  
Respontit dezo gand enor  
'Balamour d'an Aotrou Doue,  
Memprou Jezuz eo ar re-ze.*

*Roit a galon vad 'n aluzenn  
Ha dalhit mad d'an overenn,  
D'an euvrou mad, d'ar pedenno :  
An Aotrou Jezuz ho tigollo.*

*Hag, evid echui ha klozan,  
A greiz va halon ho pedan  
Da zond oll gand devosion  
Da di 'n Aotrou Krist d'ar pardon.*

*Eno, sur, ez eus relego  
Euz ar re guerra 'zo er vro  
A zo priziuz braz meurbed ;  
Diou wech ar bloaz 'vezont douget.*

*Da Bont-Krist o haser kenta  
Da di an Itron Varia,  
Deiz gouel ar Mae, ma ententet,  
Ha da ouel Krist 'vezont douget.*

*Rag-se, eta, na vankit ket  
Dond da Lokrist-an-Izelved,  
Da hounid an induljanso,  
D'ar bevar a viz Gwengolo.*

*Neuze 'ma ar zolanite  
Hag ar pardon braz el leh-se.  
Roet eo deom da bedi Jezuz,  
Ma vezo ouzom truezuz.*

Yeun ar Gow.

# Deskom brezoneg

Oberourien al levr skol « Deskom brezoneg » o-deus resevet kalz a veuleidiou evid al labour kaer o-deus nevez moullet.

An oll journaliou, koulz lavared, o-deus komzet anezañ mad kenañ, ker-kent ha m'eo deuet er mēz euz ar wask.

Lennet on-eus pennadou plijuz braz war *Le Courrier*, *Le Progrès*, *Le Télégramme*, *L'Ouest-France*, *La Croix du Dimanche*, *La Terre Bretonne*, *Le Paysan Breton*, *La Bretagne à Paris*, *Le Petit Bleu*, *Breiz*, *Bro-Guéned*, *Bleun-Brug*, *Brud*, *Le Sentier*, *Le Likès*, *Les Annales de Bretagne*...

E-touez ar berniou liziri o-deus resevet a beb korn, setu amañ arroudou euz ar re bouezusa anezo :

« Le Supérieur Général des Frères de l'Instruction Chrétienne a vivement apprécié le bel ouvrage que vous avez bien voulu lui faire parvenir. Avec ses félicitations pour votre beau et utile travail, il vous prie de recevoir ses vœux ardents pour un succès toujours plus affirmé de vos efforts de rénovation de notre langue bretonne, à laquelle, je l'espère, nos écoles sauront porter un intérêt croissant. »

« ...Je vous remercie vivement de « Deskom brezoneg » et je saisis avec joie l'occasion de vous féliciter pour ce magnifique travail... magnifiqu' à tous points de vue : textes, illustrations, présentation... »

J'aime à croire que nombreux seront les Instituteurs de Bretagne qui voudront assurer la survie et l'expansion de notre chère et vieille langue celtique. »

F. C. P. Assistant Général des Frères de l'I.C.

« Le Frère Visiteur des F.E.C. remercie cordialement le J. F. S. de son précieux envoi « Deskom brezoneg ». L'ouvrage feuilleté rapidement, lui a paru une réussite parfaite. Il souhaite sa diffusion dans nos écoles et se promet de le recommander à toutes particulièrement au cours complémentaires. »

« Le Frère J. S., Assistant Général des Frères de Saint-Gabriel, vous présente ses respectueux sentiments et vous remercie d'avoir bien voulu lui faire parvenir votre « Deskom brezoneg »... Il vous félicite de votre travail, qui résulte, ainsi que le dit le chanoine Falc'hun, non seulement d'un patriotisme breton, mais aussi d'un patriotisme français bien compris : moyen de conserver à notre pays un souvenir de ses origines celtiques... »

« Le Frère V. G., Supérieur Provincial des Frères de Saint-Gabriel : ...L'ouvrage est bien présenté, et sera précieux, sans aucun doute, pour l'enseignement, aussi, lui souhaite-t-il, une large diffusion. La Direction Provinciale le fera connaître aux maisons de Saint-Gabriel. »

« La Supérieure Générale de la Congrégation des Filles du Saint-Esprit remercie le R. F. de son aimable envoi, et souhaite beaucoup de succès au beau travail qu'il poursuit, avec tant d'acharnement. »

Saint-Brieuc, 27-1-58.

« La Supérieure Générale des Religieuses de l'Immaculée-Conception et les Mères Inspectrices des Ecoles de la Congrégation présentent leurs sentiments bien respectueux au C. F. V. S. et veulent lui exprimer leur sincère reconnaissance pour l'envoi de son intéressante grammaire bretonne qu'elles viennent de recevoir. Elles le prient de vouloir bien agréer leurs religieuses félicitations pour son beau et bon travail et ne manqueront pas de travailler à sa diffusion, dans les écoles du Finistère qu'elles ont l'occasion de visiter... »

Le 2-2-58.

« Je rentre de visites et j'ai le plaisir de trouver sur ma table « Deskom brezoneg », bien présenté, bien illustré. Il plaira certainement à tous ceux et celles qui désirent apprendre le breton, et je souhaite qu'ils soient nombreux... De tous mes efforts, j'essaierai de propager votre livre. J'aimerais tant que les « F. de J. » bretonnantes se passionnent pour cette langue qu'elles ont parlée dans leur enfance, que parlent encore leurs parents et qu'elles communiquent leur amour à leurs élèves... »

Sœur M. du D. C., Visiteuse des Sœurs de Kermaria (31-1-58).

« ...Aotrou 'n Eskob Gwened a lavar d'eoc'h, a greiz kalon, Breur M. R., gand e zoujusañ gourc'hemenou, e wellañ trugarez, evid al leor « Deskom brezoneg » a zebtant ken troet mad evid lakaat da zistrei d'hor yez koz, dreist oll ar vugale hag ar yaouankiz. »

Gwened, 21-2-58.

« L'Evêque de Quimper et de Léon, avec ses meilleurs vœux de Nouvel An, vous remercie vivement de votre livre « Deskom brezoneg ». »

Quimper, 2-1-58.

« Trugarez a greiz kalon, evit ho levr « Deskom brezoneg » hoc'h eus teurevet digas d'in. Ar re goz ac'h an en o zouez a wel gant plijadur ar re yaouank o sevel hag o kemer dorn war o lerc'h. Ar brezonek n'ei ket da fall keid ma vo tud a galon hag a spered, evelloc'h, en dro d'ezañ. Doue da rei d'eo'ch .erz hag ive pasianted da gas da benn ho ioul... »

Chaloni B, Vikel-Vraz, St-Brieg (12-1-58).

« Le Préfet du Finistère, très sensible à vos vœux, ainsi qu'à votre aimable envoi, vous en remercie et vous adresse ses meilleurs souhaits pour 1958. »

Quimper, 30-12-57.

« ...Bennoz Doue evid ho leor. Diēz e vo ober gwelloc'h, er stumm - ze, a gav din... »

D' TRICOIRE.

Ha bremañ, ar gwella doare da ziskouez hoh anaoudegez vad da oberourien « DESKOM BREZONEG » prenit al levr. Pep lenner, pep koumanter da Bleun-Brug, a gemero hirio e bluenn, da houlenn « Deskom brezoneg ».

Skriva da : V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist. C.C.P. 544.22 Nantes.

Priz al levr : 650 lur (franco).

Skoliou hag o-deus prenet dija « Deskom brezoneg » : Kerzent-Plabennec (m.) : 40 — Al Likès : 20 — Skolaj Lesneven : 20 — Loperhet (m.) : 12 — Milizac (p.) : 21 — Kléder (p.) : 20 — Lesneven (p.) : 10 — Lokournan (p.) : 6 — Plougar (m.) : 20 — Kastell-Paol (p.) : 15 — Plobannaleg (p.) : 5 — Plounevez-Lokrist (m.) : 20 — Plouezec (p.) : 20.

Eun niver mad a skoliou all, o-deus goulennet beb a hini.

D'an 8-3-58 on-eus gwerzet tost da eur mil euz « Deskom brezoneg ».



# TENZOR AR BREZONEG BEO

## 17. Berr-loer.

Berr-loerou, berr-loereier, e galleg « chaussettes ». (Skrignag, Perrot, 1941.)

## 18. Beuh !

= Huchadenn da hervel ar zaout. (Kerlann, Tregon, 1941.)

## 19. Bevata.

Beva paour, en dienez, e galleg « vivoter ». « Bevata n'eo ket beva eo. » (Kleder.)

## 20. Beza.

« Beza heller ha beza bet  
« Beza atao n'heller ket. »  
(Gorre-Leon.)

## 21. Bich.

= Ar haz. « Troi ar bich » = s'occuper à des bagatelles, tuer le temps. (St-Vig, Peron, 1942.)

[F.F. E Leon e lavarer « bis ! bis !... » da helver ar haz. « Bizig » eo ano ar haz e yez ar vugale vihan.]

## 22. Bidar.

(An taol-mouez a zo war ar zillabenn ziweza.) Eur bidar a zo eur gwaz euz bro Pleiben ha Kastellin. Eul lezano n'eo ken. Rouzig eo ar gwir ano. Bidared, bidarez, bidarezed (St-Segal, Y. Madec, 1942). Gwelit ive « E Skeud Tour... », p. 199. Tud Ploneve ha Kastell-Neve ar Faou a vez lesanvet « dardouped » gand paotred Pleiben.

## 23. Biddennou.

= Bourdou. « Eun den troet da 'farsal ha da gonta biddennou » (E skeud, p. 81). Anavezet mad tre ive e Gorre-Leon.

## 24. Biken atao.

Cette expression, surprenante à première vue, est très usitée pour énoncer la répétition fréquente d'un acte. « Kaoud a reot biken ato Yann en ti-ze. » (Vous trouverez très souvent Jean dans cette maison.) Un acte continu, ininterrompu, exige « ato » seul. (St-Segal, Y. Madec, 1942.)

[F.F. Hervez ar pezh a zo bet kontet din em bugaleaj, « biken ! » — « atao ! » oa an daou her a zistage momenter orolaj vraz an ivern e ser mond euz eun tu d'egile : « Biken ! (ne deoh kuit), atao ! (e chomoh amañ). » Evel-se an daou her o doa a benn ar fin an hevelezh stér hag a zeue d'en em harpa. Ahano eo e teu marteze al lavarenn « Biken atao ! »]

## 25. Bilbod. gg.

Eur vilbod a zo eur ganell goad da lakaad neud. (Kerlann, Tregon, 1941.)

## 26. Bilhon.

= Greun bihan a winiz. « Bilhon-gerh » : folle avoine e Kleder. E Plomodiern, folle avoine a vefe kentoh : goue-gerh ha bilhon-gerh eun doare kerh bihan hag a vez hadet hag eostet.

## 27. Bisk.

« Ober bisk dezañ, o frota e zaou viz-youd an eil ouz egile » hag o lavared komzou goapatiz evid ober mez da unan bennag. (Pleiben. E skeud, p. 82.)

E Gorre-Leon e vez lavaret « ober kibiz ». E ser frota ar bizied e vez lavaret : « Kibiz !... Kibiz !... » gand an taol-mouez war ar zillabenn ziweza.

[F.F. Er Vourh-Wenn gwechall : « rao ! rao ! » oh ober heñvel gand ar bizied.]

V. F.

# Kan al laboused



## Diskan

Kou-kou, koz kou-kou  
Setu poent an neizio !

I  
Kwik, kwik, kwik, 'me ar pintig,  
Peger kaer eo va neizig  
War eur skourr gwez-avalou !  
Tomm e vo d'am 'fintigou.

V  
(Ar haner a zo troet war-zu pintig, bidannig  
hag alhweder.)

Kwak, kwak, kwak, diouz ar vran zu  
It da guzad, oll, dioustu ;  
Da gana 'n amzer-nevez,  
'Vid on brasa levez.

II  
Bian, bian, bian, 'me 'r bidannig  
Ken kaer, ken tomm va neizig.  
Er goudor, en dishlao e  
Kuzet en eun toull er hê.

VI  
(Ar haner a zo troet war-zu ar pintig pa lavar  
kan [an hini kenta], war-zu ar bidannig pa  
lavar an eil kan, war-zu an alhweder pa  
lavar an trede kan.)

III  
Uel, uel, uel, an alhweder  
A gan skiltruz ha seder ;  
Noaz e neiz en edeier ;  
'R ganerien zo dibreder.

Kan, kan, kan, labousig-me,  
An heol tomm hag ar bleuniou,  
Glanded ha sklêrder an de,  
Hag an oll garanteziou.

IV  
(Ar haner a zo troet war-zu ar pintig.)  
Krik, krik, krik, setu ar big.  
Taol evez, va labousig !  
Pebez rann-galon em-bije  
Ma 'z afes gand al laer-ze !

NOTENN. — C'hweh bugel. — Doriou e kostezioù al leur-c'hoari. — Ar vugale, dizurz ganto, en em gav war al leurenn, o tond dre an doriou. Peb hini a gan an diskan en e bart e unan. Dizurz a zo eta gand kan an diskan. Goude-ze, unan anezo a gano koublad ar pintig, eun all hini ar bidannig, an trede an alhweder... Evel just e ranker choaz ar ganerien hervez o mouez, o ment, diouz ar pezh o-dezo da gana. Ha peb kaner a rao, en eur gana, ar jestrou diouz ar homzou. War-lerc'h ar houbled diweza an diskan a vezo kanet gand ar c'hweh bugel, goustad ar gerioù diweza.

# KELEIER

## GOUEL DIBABOU AR BLEUN-BRUG

(Éliminatoires du BLEUN-BRUG)

EVID AR HAN HAG AN DISPLEGA

D'an 11 a viz Mae, e Plougerne.

Evid skoliou Plougerne, Lilia, ar Grouaneg, Kerniliz, Lanniliz, Landéda, Tréglo-nou St-Pabu, Plouvien, Plabenneg, an Dreñeg, Lannarvili, ar Folgoad, Lesneven, Ploudaniel, St-Méen, Plouider, Plouneour-Trez, Brignogan, Kerlouan, Kernouez, St-Fregant, Guisseney.

D'an 18 a viz Mae, e Kleder.

Evid skoliou Kleder, Ploueskad, Gwinevez, Trelez, Lanhouarne, Sibiril, Plougoulm, Kastell-Paol, Rosko, Santeg, Trelaouenan, Gwitevede, Sant-Derhen.

D'ar zul genta a viz Even, e Lokournan-Leon (Sant-Renan).

Evid skoliou Lokournan, Milizag, ar Vourh-Wenn, Plougin, Gwitalmeze, Lampaul, Porz-Sall, Landunvez, Brelez, Porz-poder, Lok-Maria, Plouzane, Plouarzel, Plougon-velin, Konk-Leon, Ploumoger, Gwiler, Boharz, Gouesnou, Gwipavaz.

Setu amañ roll pep hini euz an devezioù-se :

Azaleg 8 eur hanter : kenstrivadegou ;  
11 eur : overenn-bréd ;  
14 eur : gousperou ;  
14 eur 30 : Abadenn, er patronaj

Ar skoliou a vefe mired da vond d'al leh merket dezo, a zo aotreet, evel just, da vond d'eul leh all. — Ar skoliou all euz Bro-Leon, ha n'int ket meneget amañ uheloh, a yelo war-eün da Sant-Tegoneg d'an 20 a viz Gouere.

Ar vugale wella a vo bet dibabet e pep skol, a yelo, d'an 20 a viz Gouere, da Vleun-Brug Sant-Tegoneg. Eno eo e vo roet ar prizioù.

Evid al lenn ne vo ket greet dibabou a-raog. Ar re-mañ a yelo war-eün da Zant-Tegoneg.

✱

## BODADEGOU MISTRI

Evid prepari gouel an « dibabou » eo bet bodet ar vistri hag ar mestrezed-skol :

1<sup>o</sup> e Plougerne, d'ar 16 a viz Genver. Bez ez eus bet eno 70 a dud, euz 30 skol.  
2<sup>o</sup> e Lokournan-Leon d'an 13 a viz C'hwevrer. Bez ez eus bet eno 34 a dud euz 19 skol.

3<sup>o</sup> e Kleder, d'an 13 a viz Meurzh. Bez ez eus bet eno 40 a dud euz 16 skol.

E pep leh ez eus bet roet kaozeadennou diwarbenn ar Bleun-Brug hag ar henstri-vadegou. Roet da glevet, war magnetofon ar hanaouennou hag an displegadennou. Komzet euz an Emzao breizeg a vremañ, ha greet eur brezegenn gand an tad Laurent, euz Kervenead war an doare da zeski kana d'ar vugale.

Ha bremañ, mistri ha mestrezed skol, beh d'al labour !! Lakit ho pugale, an niverusa ma hellit da gemer perz e konkourioù ar Bleun-Brug.

✱

## Labour skol.

Setu amañ an oll skoliou a zo bet roet enno abadennou brezoneg abaoe miz Du : Kerzent-Plabennec, Lanniliz, Landéda, Kerniliz, ar Grouaneg, Plougerne, Lilia, ar Folgoad, Plouvien, Bourg-Wenn, Milizag, Loperhed, Sant-Thegonneg, Plouvorn, Bodiliz, Plougar, Combrit, Plogastel-St-Jermen, Trefflagat, Lesconil, Pont-n-Abad, Landudeg, Pouldergat, Lokronan, Kastellin. Ar pezh a ra 42 skol.

## Skol dre lizer.

Abaoe ma 'z zo deuet er-mêz « Deskom brezoneg », da lavared eo abaoe miz Kerzu, on-eus enrollet 59 skoliad nevez war listenn or skol dre lizer. Deverioù ar skolidi a vez divanket gand ar Frered Riou, Salaun, Cyrille, Seite, hag an aotrounez Cormerais ha Brisson.

Heuilhit or skol dre lizer. Lakit ho mignoned ive d'henn ober. Goulennit diganeom diskleriadurioù. Harpit ahanom dre rei deom eur zikour arhant. — Kasit ho skodenn da : « Skol dre lizer », Bleun-Brug, Châteaulin, Fin. C.C.P. 157.86 Nantes. — E-leh rei arhant e hellit prena levrioù diganeom, dreist-oll « Deskom brezoneg » : 650 lur (franco).

## A-berz Kuzul Gouelioù Kerne.

Kuzul Gouelioù Kerne e-neus karget on henvroad brudet, ar skulter breizad Quillivic, da skulti eur blakenn-arem en eñvor or mignon Loeiz ar Bourhis.

Ar blakenn-a-eñvor-ze a vo staget war an ti 'leh ma vevas e Kemper, strêd Santez Katell.

Dizoloet e vo ar blakenn e-doug Gouelioù Braz Kemper 1958.

Più bennag a 'fell dezañ kas e skodenn evid ar mizou, a hell kas an arhant da gont post Kuzul Gouelioù Kemper :

M. Quéré, Trésorier du Comité des Fêtes de Cornouaille, C.C.P. 60-62, Rennes.

Arabad ankouad menegi :

« Skodenn evid Loeiz ar Bourhis ».

|   |   |   |   |   |   |   |   |
|---|---|---|---|---|---|---|---|
| N | O | A | Z |   | P | E | D |
| E | B | R | E | L |   | T | E |
| M | I |   |   | I | V | E | R |
| O | T | U | Z |   | B | E | T |
| R |   | R |   | S | I |   |   |
| A | R | Z |   | A | O | N | I |
| N |   |   |   | D | O | U | E |
| T | R | O | U | Z |   | T | O |

## GERIOU - KROAZ

Diskoulm da gudenn an niv. 107

## A-led.

- I. Mont-dond a ra heb ehan.
- II. Euz ar verb medi.
- III. Ne wel ket gand e zaoulagad. - Araogenn.
- IV. Diou wech ar memez vogalenn. - Euz ar verb uza.
- V. Benveg ar gemenéréz.
- VI. Euz ar verb beza. - Meur a hini a ra eur gevredigez.
- VII. Daou benn zoken.
- VIII. Enno e kaver tud a bedenn.

## A-bik.

1. Ode striz e neur hae.
2. Pourchas.
3. Unan muih pe nebeutoh ne ra ket kalz a dra.
4. Tost da zeg.
5. E stumm. - Penn diveza marteze.
6. A vez greet pa douer. - Araog pevar (kem-madur).
7. A ro frouez.
8. Ar grampoezéréz he-deus meur a hini.

|      |   |   |   |   |   |   |   |   |
|------|---|---|---|---|---|---|---|---|
|      | 1 | 2 | 3 | 4 | 5 | 6 | 7 | 8 |
| I    |   |   |   |   |   |   |   |   |
| II   |   |   |   |   |   |   |   |   |
| III  |   |   |   |   |   |   |   |   |
| IV   |   |   |   |   |   |   |   |   |
| V    |   |   |   |   |   |   |   |   |
| VI   |   |   |   |   |   |   |   |   |
| VII  |   |   |   |   |   |   |   |   |
| VIII |   |   |   |   |   |   |   |   |

## Bleun-Brugou 1958

E 1958 a vezo greet ar Bleun-Brug :

- 1) E PONT'N-ABAD d'an 22 a viz MEZEVEN en enor d'an Intron Varia. (Bleun-Brug Kerne.)
- 2) E NOAL-PONDI d'ar 13 a viz GOUERE en enor da Zantezed Breiz (Bleun-Brug Bro-Wened.)
- 3) E SANT-THEGONNEC d'an 20 a viz GOUERE en enor d'or Halvariou koz. (Bleun-Brug Léon.)

Mail eo dija lakaad ar vugale da zeski o hanaouennou hag o displegadennou evid ar henstrivadegou. — Goulennit diganeom evito, levrig ar honkouriou. Kaset e vezo deoh evid eun timbr a 20 lur. (Skriva da : V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin (Finistère).)